

CHANSON

VAR SUJET

AN DANSEREZ

Ton gallec : *Tu veux danser, tu danseras...*

Min meuz bet laquet ma foan
Da compozin eur chanson,
Voar sujet eur plach yoanq ha dan,
Pa meuz cavet occasion.

DISCAN : Danset hé deuz ha dansal ha ra,
Sujet he deuz da roulan joa.

Promézet mad zo dezi gant Pipi
Roch ma vo fin d'an anv-ma,
Penos ha dra-zur he teiz d'he heurejin,
Deuz quet affer da n'emp jenan.

DISCAN : Danset hé deuz ha dansal ha ra,
Sujet he deuz da roulan joa.

Ouzpent hé neuz bet dézi promézet,
Ha pa roulfé yoanquis
N'a néi james voar varch eur bidet,
Rac hin na néquet han den ha hiz.

DISCAN : Danset hé deuz ha dansal ha ra,
Sujet hé deuz da roulan joa.

Ho vid pa né zur deuz ha Pipi,
Ha hall hardi bezan joaus :
Pa gasso just hi a hal dimein,
Ha neuzé hi vo évurus.

DISCAN : Danset hé deuz ha dansal ha ra,
Sujet he deuz da roulan joa.

Pa n'ha Louisan d'an assembléo,
Hi vé guisquet excellent,
Luguernin superp ha ra hé boto,
Béan hé deuz an air élégant.

DISCAN : Danset hé deuz ha dansal ha ra,
Sujet he deuz da roulan joa.

Nep ha neuz désir da dansal,
Avancet hardi n'hé bétéc,
N'a ra forç pé meuz pé autramant eur zal,
Bezan hé eur plach ha assamblé.

DISCAN : Danset hé deuz ha dansal ha ra,
Sujet he deuz da roulan joa.

Pipi ha ia ivé d'an assemblée
Mes n'a james da dansal,
Louisan abred hen remerco,
Drég han danç ho dihougal.

DISCAN : Danset hé deuz ha dansal ha ra,
Sujet he deuz da roulan joa.

Ha vont d'ar guer d'euz han assemblé,
Hi hi a ya hasamblez gant Pipi ;
Da gontan dézan an darn hé doaré,
Arri hé contant d'a dimezin.

DISCAN : Arri hon scuz ha roulan joa,
Heur yoanquis na nè nétra.

Pipi ra cals ha réflexion,
Vid n'a vonquet eur cheval;
Mes goal piquet vé he galon
Pa voel Louisan gant ha révoal :

DISCAN : A feiz-ta, Louisan, mez Pipi,
Coulz ha vo bréman dimézin.

Chetez dimezet Pipi da Louisan,
Ha danset an hé heuret :
Daouz pez-sort danç ha rey bréman ;
Arri omp voar eur poent d'ha clevéd.

DISCAN : Danset hé deuz mes péan ha ra,
Deuz quen ha sujet da roulan joa.

Mémestra Louisan homan n'a voaquet sot,
Pa'voa ho réén hé yoanquis,
Tapet hé deuz moustran hé lot,
Ha groet-zé gant honestis.

DISCAN : Danset hé deuz mes péan ha ra,
Deuz quen ha sujet da roulan joa.

Bréman Pipi gant eur bout queneut,
Ha zonn da Louisan da dansal
Voar eur paz-man néquet distinguet,
Rac hé divoar zo arri fall.

DISCAN : Danset hé deuz mes péan ha ra,
Deuz quen ha sujet da roulan joa.

Bréman linen biolanç Louisan,
Ha zo corden eur havel;
Voar gorn an noalet héo ha tanç bréman
Ho turlutat d'eur buguel.

DISCAN : Danset hé deuz mes péan ha ra,
Deuz quen ha sujet da roulan joa.

Bréman oll assambleo Louisan
Ha vé ho rissan tréjo
Pez ha blijadur hé deuz breman
Pa gav eur varléyat toso.

DISCAN : Danset hé deuz mes péan ha ra,
Deuz quen ha sujet da roulan joa.

Pipi n'efoa bet dézi prometet
N'ajequet voar varch eur bidet
Bréman vouéjo fell dézan monet
Ha couzcoudé hé ha hep sujet.

DISCAN : Eur paourquez Louisan zo eur vroeg fur,
Ha ret dézi bezan ha dra zur.

Bréman hen plaç hé dillat charmant
Hé zo goulouet ha druillo,
An air a nézi né quen élégant;
Ha gorrec heo n'he fajo.

DISCAN : Gallout ha ra Pipi, ma laca-zé,
Derhel hardi d'hé promessé.

(Propriété de l'Editeur.)

